

8N2-4-036

Saint Eloy?



KANTIK SANT ALAR

TON : Pange solemnes.

DISKAN

*O Tad Sant Alar, Patron ker hor parrez,
Ni deu d'ho meuli herio gant levenez ;
Selaouit bepred ho mouez, hor pedennou
Euz bar an envou.*

I

Dre ho lealdet, ho labour ijinuz,
E lez eur roue braz c'houi deuaz gallouduz
Dre ho kuir furnez mignon braz da Zoue
Ha Sant braz ive.

II

A voal glenvejou aliez hor loanet
Dre ho pedennou a zo bed pareet ;
En amzer da zont grit c'hoaz dre c'hras Doue
Ma kavint pare.

III

Skoer ar gristenien aman var an douar,
Patron gallouduz en env leun a c'hloar,
Var ho pugale pedit Doue da skuilla
He c'hrassou goella.

IV

Grit ma karimp Doue dreist an oll draou krouet,
Dreist omp hon unan, dreist and oll dud er bed ;
Hag euz ar pec'het dre nerz ar garantez
 Ma tec'himp bemdez.

V

Grit ma vimp bepred tud eün, tud leal,
'Veldomp hon unan ma karimp an dud all,
Ma roimp d'an holl dre hor madoberou
 Skoer a vertuziou.

VI

Grit ma vimp sentuz da lezennou Doue,
Da vouez an Iliz ma vimp sentuz ive ;
Rag sentidigez ervez an Aviel
 A ra buez santel.

VII

A hed hor buez, beindez var an douar.
Ni dle labourat, gouzany poan ha glac'har,
Mez poan ha labour gant Doue benniget,
 Zo frouezuz meurbet.

VIII

Grit ma zei eun deiz d'an envou d'ho meuli,
Da veuli Doue hag ar Verc'hez Vari,
Da veuli ar Zent, da veuli an Elez,
 Oll dud ar barrez.

Y. M. M., miss. ap.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 17 Décembre 1904.

F. CORRIGOU,
Vic. Gén.